

Glad

Ar sent o reiñ buhez d'ar vro.

Nepell zo c'hoazh ne oa nemet ur raktres. Met mont a ra raktres "Trao-nienn ar Sent" war-raok a gammedoù bras.

A-ratozh kaer eo bet digoret chapel vihan Sant Weltaz evit ma c'hellfe Raphael Vallery, kelenner hag istorour kas e brezegenn da benn diwar-benn donedigezh ar Vretoned en Arvorik. Dirazañ, staliet war bankoù, ur c'hant bennak a dud, deuet da glevet doare eus Sant Sadorn hag ar re all a-raok loc'hañ evit



Malo hag e vag, war an dosenn, e sellou troet war kêriadenn Karnöed.

ur bourmenadenn gant Muriel Brizai. 200 metr pelloc'h zo tud all, war tosenn Sant Weltaz, oc'h ober tro ar voudenn feodel kelc'hiet gant ur foz don, ha diwallet gant ar 6 delwenn gentañ, unan dre eskopti Breizh, a zo bet staliet eno abaoe bloaz. Aze emañ ar 6 sant kentañ, diazezourien Breizh : Brieg gant e vreiz, Kaorantin gant e besk, Malo gant e vag..., troet o sellou war-zu ar maezioù tro-dro. A-raok pell o do kompagnunezh gant ur rummad all, anezho sent brudet-tre e Breizh evel Santik Du, Santez Anna pe c'hoazh Sant Herbod... Echu ar c'hizellañ evit Sant-Erwan met chom a ra c'hoazh c'hwec'h all war chanter kêriadenn an artizaned,, e Kenekiellek, a ranko bezañ lakaet en o flas d'an 28 a viz Eost. **"Tro-dro da gern an dosenn e vint lakaet, hervez ali ar bodad sevenadurel."** a resisa Sébastien Minguy, e-karg eus ar raktres. Ne c'heller lakaat an delwennoù re dost ouzh ar chapel nag ouzh ar c'hamp roman kozh, takadoù gwarezet anezho o-daou. Met n'eo ket ar plas a vank, koulskoude. Un dachenn a 37ha a zo bet prenet gant an ti-kêr evit reiñ bod d'ar sent kentañ ha d'ar mil all a rankfe bezañ staliet er 25 bloaz da zont.

Ur stal labour

Pelloc'h, nepell ouzh Kenekiellek, ur c'harter tiez kozh brav dilezet, zo buhez e-leizh. E-kreiz un toulompi bras zo c'hwec'h kizeller eus ar vro, eus Santeg da Bleneuf Val-André, o poaniañ war bep a damm greunvaen 17-20 tonenn. Aze e oant holl warlene, dija, war-bouez ki-

zeller Herbod, Bruno Panas. Eus Breizh e teu an holl vein, eus Ploueskad, An Uhelgoad, Louvigne pe c'hoazh eus Sant-Kareg. Un doare eo ivez ar chanter da vrudañ micherioù ar c'hizellañ. **"Abouez eo seurt chanter evit deskiñ buan"** eme Norbert Le Gall, un deskard deuet eus Brest gant ar soñj mont war ar vicher. **"Kozh eo lod eus ar gizellerien ha prederiet int gant ar stummañ yaouankizoù war o micher"**. N'eus ket ur bern chanterioù bras a seurt-se evit deskiñ ar vicher. **"Un darempred diazezet war an energiezh eo ar c'hizellañ. Kalet eo an danvez a vez labourer met kizidik e rank bezañ ivez ar c'hizeller. Un arzour eo."** a zispleg David Puech, eus Plougreskant, kizeller Paol ha Gweltaz. **"Mont pelloc'h eget an objed eo an diaesañ. Reiñ buhez d'ar maen, lakaet un ene da ziwan a daolioù kizell."**

Deuet da wir

Ar pezh a seblante bezañ ur raktres foll a zo o tont da wir. E 2011 e vo kizellet 8 delwenn nevez, en o zouez 5 delwenn vras, unan dre zepartamant, evit enoriñ Renan (29), Nolwenn (56), Tugdual (22), Meen (35) ha Clair (44), bodet holl dindan ur memes raktres : pemp delwenn vras evit ur Breizh. Evit ar bloavezhioù goude eo krog ar gevredigezh "La Vallée des Saints" da dreiñ war-zu ar c'hêrioù hag an dud war o anv, da welet hag-efñ e fell dezho sikour sevel delwennoù. Lañset mat eo dija raktres Sant Karanteg ha Sant Idi, e-kichen Montroulez.



David Puech hag e verc'h Zora dirak delwenn Sant Weltaz.

Ouzhpenn reiñ buhez d'ar sent e fell da vignoned Sébastien Minguy ober. Gant ar soñj sevel un abati keltiek e 2011 emaint ivez. En diskar-amzer diwezhañ eo aet ur skipailh gant Job an Irien betek Bro-lwerzhon ha Bro-Gembre da studiañ ar furchadegoù bet graet eno. Ur skol war ar sevel mogerioù gant mein sec'h a grogo hepdale e Sant-Brieg.

E 2010 e oa bet savet ar gouelioù kentañ tro-dro d'ar c'hizellañ, prezegennoù ha fest-noz vras... A-benn bloaz e fell da vignoned ar sent ober gwelloc'h. Kaoz a zo ganto a sevel ur mizvezh buheziñ, eus hanter miz Gouere betek hanter Eost, klozet ma vefe gant sevel ar vein bet kizellet e-pad ar miz.

Greanterezh

"Petit Navire" war-zu dremmwelioù all.

E 1932, e Douarnenez, e kroue Paul-Edouard Paulet ar merk Petit Navire. 78 vloaz goude e teu un embregerezh thai da vezañ mestrez war ar stal.

E 1986, dija, e oa bet prenet ar stal gant ar stal amerikan Heinz evit bezañ gwerzhet, 20 vloaz goude, d'an embregerezh Trilantic, ur stal dindan beli MW Brands ha, pelloc'h, hini an ti-bank Lehman Brothers. Ranket he doa Trilantic kaout 425 milion a euroioù evit prenañ an embregerezh hag ar merkoù a ya da heul, Petit Navire, Hyacinthe Parmentier pe c'hoazh Mareblu, staliet e Bro-Italia, ha John West e Bro-Saoz. 4 bloaz goude

e vez gwerzhet en-dro ar stalioù hag ar merkoù evit 680 milion a euroioù.

Da welet

Gant prenañ an embregerezh MW Brands e fell da TUF, Thai Union Frozen Products hag e rener Thiraphong Chansiri, dont da vezañ produer kentañ ar bed war ar boued-mor-mir. Evit ar poent n'o deus stal ebet e Europa ha ne vefe da gaout aon evit ar postoù-labour. **"Kenglotus eo an div stal"** eme David Sankowicz, sekretour meur MW Brands.

"Gwelet e vo" a respont Corentin Brouquel, dileuriad FO e Douarnenez. O paouez koll 47 implijad emañ stal Paulet, dija, war an 297 a gonte betek-henn.



Anavezet-mat, ha pelloc'h eget Douarnenez, eo ar merk skeudennet gant ar bigi.

Energiezh

Ne fell ket d'ar Rannvro kaout un troc'h-tredan.

E-kerzh an div c'hoañvezh diwezhañ eo bet tost da Vreizh chom hep tredan. Fellout a ra d'ar Rannvro talañ ouzh ar gudenn.

Ur wech deuet miz Eost ne vez ket, peurvuiañ, lakaet ar gaoz war an energiezh paneve evit menegiñ ar c'hresk boas war priz ar gaz hag hini an tredan. Koulskoude, evit digeriñ emvod meur ar C'huzul-Rannvro, bet dalc'het d'ar 24 a viz Even, en doa embannet ar prezidant Jean-Yves Le Drian bezañ prederiet bras gant ar gudenn, c'hoant gantañ ober eus Breizh **"ledenez an araokaat a-fet tredan"**.

Hag efñ da ouzhpennañ **"Hiziv an deiz e c'hell an holl Vreizhiz bezañ lakaet diaes gant un diouer a dredan"**. E miz Genver 2009, dija, e oa bet start pourveziñ mat ar rannvro abalamour d'ur c'hresk war ar goulenn, pignet betek 17 100 megawatt. E penn kentañ ar bloaz-mañ eo bet diaes c'hoazh, hep bezañ ken start, memestra, hag ar pezh a zo c'hoarvezet e Provence-Alpes-Côtes-d'Azur. Breizh 4 departamant ne brodu nemet 8% eus hec'h ezhommoù ha war washaat ez aio pa ouzer e kresk an ezhommoù hag ar boblañs. Setu perak e oa bet roet lañs, bloaz zo, d'un emglev-tredan breizhat.

Emglev war ar tredan

Gant ar mennozh-mañ e oa bet pedet gantañ, d'ar 6 a viz Gouere, ar prefed, an holl strollegezhioù, renerien ekonomiezh ar vro ha dileuridi ar sindikadoù hag ar c'hevredigezhioù. Roet en deus da c'houzout pere a vefe ahelioù bras an emglev-se : espertiañ war an dispignou energiezh, diorren an energiezh adnevesaüs hag, evit echuiñ, krouiñ kreizennoù produiñ tredan. Gouzout a ra eo aet da fall raktres kreizenn tredan Ploufragan betek bezañ dilezet abaoe 2009 dre ma oa kinniget fall ar raktres ha savet ar c'hevredigezhioù a-eneptañ. Abaoe

darvoudoù Plogoñv e ouzer pegen kizidik e c'hell bezañ ar boblañs war danvez an energiezh. Met n'eo ket kreizennoù Dirinonn (29) ha Kordevez (Cordemais, 44) evit produiñ a-walc'h evit ar vro. Savet he deus ar gevredigezh "Investir en Finistère" he mouezh evit embann sklaer n'eo ket trawalc'h kontañ war energiezh an heol hag hini an avel hag ezhomm e vefe, war he zachenn, eus ur greizenn dredan gaz evit produiñ 800 megawatt. E miz Gwengolo e vo aozet eil emvod an emglev-mañ.

RLF